


# bremañ

**DIWAN : EMGAV E LANDERNE**



**BREIZH NITRATET DA VAT ?**



**miz Even 1990 - niv.105 - 15 lur**

## Lizhiri



### Respont da Jakez VINCENT

Ne blij ket din an tabutoù difrouezh a-zivout ar chudennoù a soñj din ez eo achu gante : kudenn an doare-skrivañ hag hini peurunvaniezh ar Brezhoneg. Rantout a ran kemer ma fluenn evelato, a-benn displegañ ma soñj ur wech da vat.

Morse ne m'ous lavaret na skrivañ e raen fae war ar rannyezhoù, na graet kennebeut. Er c'hontrol, pinvidigezhioù ar rannyezhoù eo ay a d'ober ar yezhoù. Ret eo tennañ gounid eus an holl rannyezhoù brezhonek evit pinvidikaat ar Brezhoneg. N'eo ket peogwir n'en deus ket ar Galleg kemeret e kont rannyezhoù e tle ar Brezhoneg ober heñvel.

Evit pezh a sell ouzh doare-skrivañ ur yezh avañ, e soñj din ez eo ret kaout unan hopken. Meur a zoare da zistagañ ar yezh : ya ; meur a c'her da lavarout an hevelep soñj : ya ; met un doare da skrivañ, mil c'hast ! Ma soñj deoc'h ez eo bezañ sparlet soñjal evel-se, ya, sparlet on, ha sparlet e vin da viken.

N'on ket prederiet gant doare-skrivañ ar rannyezhoù gallek na gant hini ar re vrezhonek, gwir eo. Gant o finvidigezh, ne lavaran ket.

Gwenael CARADEC

### Kañv

Glac'haret omp o klevout eo marvet MELIAU, breur Maiwenn ha mab Odile Kerzenho ha Yann Raynaudon, eus Skol Diwan Naoned. Kemer a reomp perzh en o doan.

### DIVUNADENN

Pa yezh eo an hini wallañ evit sevel barzhonegoù ? (Respont P.19)

### EMAN DIWAN O KLASK

ur  
**RENER PEDAGOGEL**  
da ober war-dro  
ar Stummañ  
ar Bedagoglezh  
an Tuta.

C.V. da gas da  
**Rener DIWAN**  
B.P. 22  
29870 LANNILIZ  
98 04 05 42

Skolaerien  
Danvez Skolaerien  
Implijidi Burev

Kas ul lizher hag ur C.V. da  
**DIWAN**  
B.P. 22  
29870 LANNILIZ  
98 04 05 42

### SKOLAJ DIWAN ROPARZ HEMON

a glask

**KELENNERIE**

**ISTOR-DOUARONIEZH**  
(post 1/2 amzer)  
**GALLEG**

(post 1/2 amzer)  
**SKIANTOU AN NATUR**  
(nebeud eurvezhoù)  
**ALAMANEG**  
(nebeud eurvezhoù)

**1 SEKRETOUR(EZ)**  
**LEVRAOUEG(EZ)**  
(1/2 amzer)  
**1 ANIMATOR(EZ)**  
(1/2 amzer)

Kas ul lizher hag ur C.V.  
da **DIWAN**  
Servij an Implijidi  
BP 22  
29870 LANNILIZ  
Peil. 98 04 05 45

**MALLUS TRE !**



D'an 19 a viz Mae, da zeiz Gouel St Erwan, eo aet Bretoned Pariz, strollad skoazell Diwan bro Pariz, da vanifestiñ evit goullenn digant ar gouarnamant sinañ gant skolioù Diwan an emglev en deus sinet endeo gant Skolioù Euskadi, Okitania ha Katalonia.

# PETRA NEVEZ ?



### Miz Ebrel 1988

Dre ar stourm e teu DIWAN a-benn da c'hrount ur "Protokol" : ul lod eus ar skolaerien a vo gopret gant ar stad, ma vez doujet da reolennoù 'zo.

### Miz Mezheven 1989

Dre ar stourm e teu DIWAN a-benn da vodañ ar Rannvro, Departamantoù breizh hag ar Rector evit ma vo doujet d'an Emglev hag evit renkañ kudenn an dia.

### Miz Du 1989

Sinet ez eus bet etre Seaska hag ar Stad un Emglev : gopret e vo an holl skolaerien, hep harz ebet. Ur prantad goude, e sin ar Gorsiz, ar Gatalaniz hag an Okitaniz.

### Nevez-Hañv 1990

Gant ar Protokol, e vez gopret e DIWAN 12 post skolaer diwar 50,5.

Mankout a raio da ZIWAN etre 4 ha 5 milion evit echuiñ ar bloavezh.

Goullennet eo bet gant DIWAN e vefe kinniget daomp un emglev par da hini Seaska. Nachet eo bet.

### Miz Gouere 1990

N'eus ket arc'hant ken evit paeañ ar skolaerien. Miz gwengolo 1990 : ha serret e vo ar skolioù DIWAN ?

Ur wech ouzhpenn emañ DIWAN en arvar da vont da get.

Lakaet ez eus bet 3 fal diouzh ha ret eo dont a-benn dezho a-raok dibann miz Mezheven 1990 evit gelout derchel ganti :

- sinañ un emglev par da hini Seaska,
- renkañ kudenn an dia,
- bezañ skoazell en un doare efedus gant dilennidi Breizh.

Evit ma chomfe bev DIWAN, ar gerent o deus kroget e-barzh an traoù :

- ul labour-daremprediñ an dileuridi, koulz re an Departamantoù, an Tier-Kêr



hag ar Rannvro, a zo bet graet, dreist-holl war-zu ar sokialourien, evit ma sikouzellfent ha ma sikourellfent ach'anomp.

-taolioù a bep seurt a zo bet ivez evit brudañ hor stourm koulz er vro hag e Pariz : taolioù pellgomz dizehan, aloubiñ enselli di Brest, Kemper pe Sant-Brieg, li an Tailhoù e Landerne, li Deputeed'zo, manifestadeg dileuridi ar skolioù dirak Prefeti ar Rannvro.

D'an 12 a viz Mae, e oa bet bodet ouzhpenn 350 a gerent e Mellag hag e kemper.

D'an 21 a viz Mae ez eus kaoz vras war DIWAN er C'huzul Rannvro evit ma vije un Emglev nevez heñvel ouzh hini bet gant an Euskariz.

Hiriv e talc'h ar gouarnamant da nac'hañ an emglev ouzhpenn, hag ezhomm o deus kerent DIWAN

bezañ soutenet gant muioc'h a dud c'hoazh. Diskouezet o deus dirak an holl pegen start e oant mennet da vont betek penn.

Met bremañ, emañ DIWAN o c'hervel holl e vignoned hag holl vignoned ar brezhoneg da gemer perzh e-barzh ar stourm en ur vont da vanifestiñ e Landerne.

**MANIFESTADEG d'an 9 a viz MEZHEVEN e LANDERNE da 3 eur e sal ar Family**

Gouzout a oar an holl pegen pouezus eo DIWAN evit dazont ar brezhoneg. Arru eo poent diskouez :

- e skoazellit skolioù DIWAN

- n'oc'h ket evit asantiñ e varv ar skolioù brezhonek.

Evit-se, ez och pedet holl da vont da Landerne.

# SKOL DIWAN KOMANA

E-touez ar re goshañ emañ Skol **DIWAN Komana**. E gwirionez he deus graet ar skol-se un hir a veaj a-raok en em staliañ da vat war dachenn an Dourig e-lec'h m'emañ hiziv. Bet eo er Releg, e Sant-Jakez Landivizio, er Vougev hag ar re goshañ e-touez ar vugale o deus dalc'het soñj mat eus an ti kozh tefval hag eus al lodod-dall a gavent morgousket ouzh al lein, hag ivez eus an devezhioù ma veze ret serññ ar skoli abalamour d'an erc'h. Nag a biljadur !

A-drugarez da **Bark an Arvorig** ha d'an ti-kêr emañ ar skol hiziv staliet war un dachenn vras ha kaer. 5 sal a zo, unan o vezañ implijet evit ar predoù ha kousk-aez ar re vihan, unan a-ratozh evit ar galleg, unan evit ar c'hentañ derez hag an div vrasañ evit ar skol-vamm.

20 bugal a vez o tarempeidiñ ingal ar skol-vamm gant **Brigitte** ha **Sylvie** evit he skoazellañ. **Roland** a ra war-dro ar c'hentañ derez ha **Madeleine** war-dro ar galleg hag ar sport. Ouzhpenn-se e teu bep sizhun **Gildas** da bleustrin gant ar vugale war ar sonerezh.

Ha moarvat e vefe drouklaouen ma tisoñjemp ober anv eus **Monique** hor geginerez, a oar fardañ traoù lipous dezho a-hed ar sizhun ! Met kentoc'h eget un hir a brezegenn, roomp ar gaoz d'ar skoldi da d'o skolaerien ...



## Pennad-kaoz gant Brigitte, skolaerez ar skol-vamm.

*G- Brigitte, oc'h ober war-dro ar skol-vamm emañ abaoe tost tri bloaz, pesaut diaesterioù 't eus bet, ha penaos e welañ an traoù hiziv ?*

R- Ya, evel just 'm eus bet diaesterioù e-keñver ar yezh, mont en-dro ar c'hlas, hag e penn kentañ en darempredoù gant lod eus ar vugale. Ur gwir stummadur ne oa ket anat da gaout atav. Dont a ra da vezañ gwelloc'h tamm-ha-tamm.

*G- Daoust ha n'eo ket diaes da labour war ar yezh gant kement a vugale ?*

R- Geo ! Diaes-tre eo pa vez ur strollad ken bras. Pev ar live zo ganin memestra. E-keñver ar yezh ez eo ur gudenn vras : n'hellan ket bezañ gant pep hini. Penaos ober ? Goulenn a ran digant ar re vras sikour ar re vihan, met siwazh ez eont allies e galleg ganto evit bezañ komprenet.

*G- Penaos e rez evit kas anezho war zu ar brezhoneg ? Die ar c'hoari, ar c'hanaouennoù, an istorioù, traoù all c'hoazh ?*

R- Ya, ret eo c'hoari kalz ganto, kanañ a reomp ivez alies-tre. Lennel e vez istorioù bemdez. Labourat a ran ivez gant fichennoù.

*G- Penaos e tremen un devezh ordin er skol-vamm ?*



R- Diouzh ar mintin e vez degemeret ar vugale, ha goude e vez lezet ur frapad amzar vak dezho. Goude e vez graet un diviz, kanet ha dañset e vez, ha tresañ pe livañ. Goude an ehan e vez labourer war ar grafism. Amzer o devez da c'hoari o-unan a-raok renkañ ar c'hlas. Goude lein e chomont sioul ur pennadig a-raok kregin gant al labour-dorn, un tamm jedoniezh pe raglenn. Evit echuiñ gant an devezh e vez graet embregerezh-korf, kontet un istor ha debret merenn vihan.

*G- Daoust ha tro ho pezh a-wechoù da vont er-maez eus ar skol ? Daoust ha darempredoù ho pezh ingal gant ur skol all ?*

R- Ya, darempredoù hon eus gant skol-vamm Brest. Mont a reomp da welañ anezho ur wech an amzer. Mont a reomp nebeutoc'h bremañ dre m'eo deut ar strollad da vezañ re vras.

*G- Daoust ha kenlabourat a rez gant skolaer ar c'hentañ derez, da skwer evit ar vugale a zo oc'h echuiñ o frantad Skol-vamm ?*

R- Ya, eskemm a reomp kalz, klask a ran gouzout ar pezh a zo ret d'ar vugale gouzout evit ma vefe aesaet labour ar skolaer all. Kroget omp da labourat war ar gerioù, dre demou, gant skoazell ur geniadurig nevez deut er-maez hag a zo bet prietret gant meur a skolaer a-gevret. Aesoc'h eo gwelet sklaer evel-se.

*G- Penaos e welañ an traoù e-keñver ar brezhoneg er skol-vamm evit ar bloavezhioù da zont ? Petra vefe ret d'az soñj, evit gwellaat al live ?*

R- Ret e vefe chom hep kargañ re ar c'hlasoù ha neuze kaout skolaerien a-walc'h. Ret-mat e vefe ivez e vefe kendalc'het al labour er gêr. Aze emañ an dalc'h, a gav din !

## Pennad-kaoz gant Prezidant an A.E.P.

*G- André, pa 't eus kemeret ar c'harg-mañ e oas o paouez distreiñ da Vreizh. E-pelec'h e oas a-raok ? Daoust hag anavezet ez poa skolioù damheñvel du-hont ?*

R- Ya, e Toronto e oamp, e Bro Ganada. Ar vugale oa bet ganet o-zri er gêr-se. Skolioù divyezhek a zo an Ontario ha skwer ar skolioù galleg "immersion" en deus servijet da Ziwan.

*G- Petra eo kefridi Prezidant an A.E.P., e Komana ?*

R- betek-hen, prezidanted an A.E.P. o deus bet a-leizh a labour d'ober evit diazezañ ar skol a oa bet digoret ar Releg e 1979. Pemp bloaz 'zo emmaomp en Dourig e Komana, ha ne vank mui nemet ur sal-debrin gant ur gegin a-zoare. A-hent-all ez eo karget ar Prezidant da zarempeidiñ DIWAN Breizh, ar gerent, ar skolaerien, ar Park, an ti-kêr hag all ...

*G- Pesaut darempredoù zo etre ar skol hag an ti-kêr hag ar Park ?*

R- Mat-tre an traoù. An ti-kêr zo perc'henn war an dachenn e-lec'h m'eo bet savet ar skol ha Park an Arvorig en deus savet ar c'hlasoù. Harpet mat omp gant Jean LE SAINT, an Actrou Maer ha gant Jean-Yves COZAN, Prezidant ar Park.

*G- Daoust ha skol Gomana a seblant diñ bezañ ur skol buhezek e-lec'h ma vez kembodet mat al labour etre an dud ?*

R- Evel just ne vez morse trawalc'h a dud d'ober al labour. Diaes eo kavout tud da vont d'ar C'huzul-Ren pe da gomisionoù all. Er skol, avat, ar gerent hag ar skolaerien a labour mat a-walc'h asamblez hag an holl a zeu da sikour evit Tro Menez Arre.

*G- Tro Menez Arre, petra eo an devezh bras-se ?*

R- Un devezh bale eo. Dalc'het e vo evit an eil gwech d'ar 6 a viz Mae. Warlenn e oa bet tost da 400 den o vale war ar menez, oc'h ober 10, 20 pe 40 km zoken. Ur pred hag un abadenñ hag ur fast-noz a vez ivez. Mar bez brav an amzer e vo emic'hañ 500 den o kemer perzh ar bloaz-mañ. Aozet e vez ar gouel-se da zastum gwenneien a servij da baeañ ar skoazellerezh ha da brenañ traoù evit ar skol.



# Pennad kaoz gant Klet

G- Traoù all ?

R- Ya. Er bloavezhioù da zont e vo labourer muioch war-zu parrezioù na gasont ket c'hoazh bugale da Gomana. Mat e vefe kaout tud eus an Dre, Gwimilio, Lok-Eginer hag ivez Lambaol. Pa vo echu ar savadurioù e vimp gouest da zegemer 50 bennak a vugale. Bremañ hon eus tost da 40. E 1991 ez aio ar re goshañ d'ar skolañ ha neuze e-pad un nebeud bloavezhioù e tlefe chom niver ar vuglae etre 40 hag 50. An tuta vez graet gant ar familhoù. War ar maez ez eo aesoc'h anavezout an dud a c'helle kas o bugale da ZIWAN, kaozeal gant an amezeien... Frouezusoc'h eo ar mod-se d'ober dre amañ eget aozañ taolioù bras bruderzh pe dorioù-digor. Bep bloaz e welomp 3 pe 4 bugel nevez o tont, kreskiñ a reomp goustad met ingal. Ur skol solud a-walc'h ha yach omp deut da vevañ tamm-ha-tamm, ar pezh a souezh tud 'zo !

G- Mont a rit a-wechoù e-maez ar skol ? D'ober petra ?

R- Mont a reomp d'ar sal-sport ha d'al levraroueg. Ur wech e oamp bet er sirik, hag ur wech e Daoulas da welet un diskouezadeg war ar Gellied. Pa oamp er skol gozh ez aemp da bourmen war ar menez. Bet omp ur wech ivez e Berrien da welet ar mengleuzioù pri-gwenn. Yen e oa hag ar vugale a oa lous !

G- Daoust hag-eñ vez graet gouelioù er skol ?

R- Ya ! Gouel nedeleg, deiz-ha-bloaz ar vugale ha Meurlarjez. Kanañ a reomp, ober a reomp maskloù, roet e vez profoù ha gwastill a bep seurt a zo.

G- Roland, bloaz 'zo pe dost emacout och ober war-dro ar c'hentañ derez e Komana, penaos e welez an traoù ? Da gentañ, pet skoliad zo ganit, pet live ?

R- Da gentañ e oan bet souezhet o welet kement a vugale er skol Diwan en ur barrez ken bihan ha Komana, ar pezh a ziskouez eo pouezus lec'hiañ mat ar skolioù, kreizennañ mat anezho. C'hwezek vugale zo ganin, adalek ar CP betek ar CM1.

G- Peseurt doare kelenn eo da hini ? Daoust ha diaes eo diazez ur mod labourat efedus gant ur c'hlas meur a live ennañ ?

R- Gwir eo, n'eo ket anat kas war-raok ur c'hlas meur a live ennañ. Ur seurt embregerezh spered eo. Ret eo bezañ prientet mat, kaout ur sell holiek war ar c'hlas hag hiniennel war pep hini. Ar vugale a rank ivez deskiñ labourat muioch o-unan eget en ur c'hlas gant ul live hepken.

G- Daoust ha darempredoù, eskemmoù ho pezh gant an diavez, gant klasoù all, pe re ?

R- Gant al labour a oa da gas war-raok e-barzh ar c'hlas eo bet berr an amzer da gaout darempredoù gant an diavaez. En trimiziad-mañ e vo kavet muioch a amzer da gaout eskemmoù gant skolioù all, hini divyezhek Sant-Riwall da skwer ha n'eo ket pell diouzh Komana.

G- Daoust ha diaesterioù resis 'zo, e-keñver live yezh ar vugale, pe diouer a blas pe traoù all ?

R- Ne gav ket din e vefe kudennoù resis e-keñver live yezh ar vugale. Evit ar pezh a sell ouzh braster ar skol, n'eo ket da glemm. Savet ez eus bet deomp daou glas all e miz Here, peadra da zegemer bugale nevez.

G- Peseurt pare d'an diaesterioù-se ?



G- Te zo unan eus ar re goshañ er skol. E-touez an holl draoù graet ganeoc'h, pe re o deus plijet dit ar muiañ ?

R- Mont d'ar sal-sport ha c'hoari mell-dorn. Al labour-dorn hag ober priaoù a zo plijus ivez... Hag ur wech e oa deut FR3 da filmañ ach'anomp. Deuet e oa ivez bugale a vro Euskadi da welet ar re vras... Enrollet hon eus ivez ur c'hasedig gant Gildas. Ijinet e oa ar c'hanaouennoù gant ar vugale ha Gildas a lakae sonerezh. Tremen a ra ar c'hanaouennoù war RFI a-wechoù.

Mare ar vakañsoù eo ! Ha Gwennohian, Steven, Loieza, Kaou, Yannig hag ar re all zo nijet kuit... Deut omp a-benn memestra da dapout unan hag en deus respontet d'hor goulennoù.

G- E peseurt klas emacout, Klet ? Pet skoliad zo ganit ?

R- E CE2 emañ, gant Roland. 16 emacomp er skol.

G- Te zo bet er skol gozh, pe hini eo an hini blijusañ ?

R- Plijusoc'h e oa er Vougev evit an ehan peogwir e oa an daol-vaen e-kichen. En Dourig n'eus netra evit c'hoari er-maez.

G- Kont dimp un tamm petra vez graet e-pad un devezh skol ?

R- Diouzh ar minton e reomp brezhoneg, goude merenn labour-dorn pe skiant pe jedoniezh pe douaroniezh. Ar jedoniezh pe deskiñ traoù dre eñvor ne blij ket din re ! Ar yezhadur a blij din. Pa vez echu gant al labour e c'hellomp mont war an tapis da lenn pe neuze tresañ. Ret eo ivez skubañ, renkañ al levioù hag ober war-dro ar plant. Er c'hañtin ar CM a ra war-dro re ar skol-vamm. Distallet e vez an traoù ganeomp.

# Ur banne nitrat ac'h ay ?! ganeoc'h ?



20 vloaz zo bremañ emañ difennerezh an endro o vraliañ ar c'hleier-galv en abeg da saotradur an dour.

Ha da gentañ-penn ar bankoù, hag ar c'hompagnonezhioù-boued bras gall holl c'halloudek a dalvez 50 miliard a lurioù ezporzhadurioù bep bloaz.

Met ar c'houarnerien n'o deus ket soñjet e tale ar boan selaou kemmañ a gavent ken aes godisat n'eus ket gwall bellou.

Kablus eo ivez al laboureriedouar, evel ma 'z eo kablus ar sklavet a bleg da sujerezh o mistri. Koulskoude, un toullad mat anezho a zo krog da implij doareoù-labour all, da c'houiniñ bevañs a dalvoudgezh en ur zoujañ ouzh an endro. War an tu-se eo ret mont, rak n'eus ket tu ken d'empentiñ d'ar c'hel buhez war ar maez ma tile an douar mat bezañ dalc'hel gant produerion brasoc'h-bras hag ar peurrent mont da fraost diwar dibabou armerzhel graet gant teknokratid Pariz pe Vrussel, ne vern.

Ha dour zo c'hoazh en nitrat ?

Hag ar c'hontammoù ?

Hiziv e rank paeañ en abeg d'ar saotradur tud n'int ket kiriek : un tiegezh 4 a dud na eufe nemet dour boutailhoù a baefe 3500 lur ar bloaz.

Met gwashoc'h zo eget an nitrat brudet-sa, a vez re alies evel goadeg vrein. Brasoc'h arvar a zeu diwar al lastez kimiek, an temzoù kontammus hag ar metalioù ponner a gaver muioch-mui e dour ar stêrioù ma ne vez mui pesk ebet, pa n'eo ket gant ar c'hlor a c'han kloraminou a zegas ar c'hign-bev.

Emañ an dour en arvar, e daou zoare : ouzhpenn bezañ falloch-fall n'eus ket tra-walc'h anezhañ ken. Ha n'hall nemet mont war washaat ma ne gemm ket doareoù al labour-dour : gant an dilodannañ ha diskar ar gwez diouzh an eil tu, gant an hentoù bras nevez hag ar makadarn o c'houiniñ tachenn diouzh egile, e teu an dour da vezañ ral, ken ral ma teuer da gaout aon rak ar glaveier a greskie teur an nitrat an dour. Piv zo kaoz, ma n'eo ket sistarn ar gounid-da-gentañ gant e azulerierioù selout ouzh an douar evel ouzh ur spouezenn, a c'hallfent diwaskañ dizehan ?

Arabat gortoz ken ma fell dimp lagadit d'hor bugale ur bed ma anavezint dour mat d'evañ d'ur priz dereat evit an holl : stourm ouzh ar saotradur a zo stourm evit ar vuhez.

Y.L.

**BEP DAOU VIZ LENNIT**

**AL LANV**

59 hent Kerdronioù Vihan  
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur  
Skozell adalek 130 lur

EVIT STOURM OUZH AR SEC'HOUR EVIT HO PASTIS DIZOUR!



80 lur an T-shirt ment XL  
10 lur ar badj,

# Eil CONSEU e BARSELONA



D'an 25, 26 hag 27 a viz Mae e talc'he **CONSEU**. Kevredigezh Broadoù Hep Stad Europa ar C'hornôg, he eil emvod meur e Barcelona (Katalonia). Dileuridi eus ouzhpenn 10 vro hep stad o deus kemeret perzh en divizoù.

### Kemm anv

Ar mennad kentañ degemeret gant ar berzhidi zo kemm anv ar gevredigezh. Deuet eo **CONSEU** da vezañ **CONSEU** : Conferencia de Naciones Sense Estat de l'Europa, Kevredigezh Broadoù hep Stad Europa. Dre ma eo krog an

traoù da gemm en Europa Kreiz ha Reter hag aesoc'h kaout darempred gant emsavioù ar broadoù hep stad du-hont, e fell da **CONSEU** ledanaat he zachenn ha dont da vezañ al liamm etre broadoù hep stad Europa a-bezh. Evel-se e oa bet pedet dileuridi eus ar broioù Balt, eus Slovenia ar Reter hag eus Armenia da zisplegañ o stourm evit o frankiz.


### Eus Breizh ivez

**EMGANN**, ezel eus komite etrevroadel **CONSEU**, en doa pedet aozadurioù all eus Breizh da gemer perzh en Emvod Meur. Aet e oa eta

dileuridi eus **UDB**, **SAB**, **Skoazell Vreizh**, **SAE** ha **POBL**. Hir ar veaj, met talvoudus-tre d'an holl ha skiant da brenañ e-leizh digant ar re all ha da werzhañ dezhe ivez, na petra ta !

### 4 bodad labour

Ingalet e oa bet an dud etre 4 bodad labour a-benn plediñ gant mennadoù an eil **CONSEU**. Ur bodad ekonomikel, ur bodad sevenadurel hag unan a-zivout an darempred Nord/Su. Ar mennadoù daet er-maez eus ar bodadoù labour hag asantet gant an



emvod meur a zo tu o c'haout amañ e Breizh gant an aozadurioù o deus kemeret perzh en eil **CONSEU**.

### Diskleriadur ar pobloù

Darvoud puezusañ an eil **CONSEU** eo bet embannadur "**Diskleriadur Holvedel Gwinoù a-stroll ar Pobloù**" kiniget gant ar c'homite etrevroadel gant sikour arbennikourien hag asantet gant an holl war bouez unan. Un diskleriadur a vo brudet ma vo anavezet ha doujet dre ar bed a-bezh.

Tu zo da gaout mennadoù ar bodadoù labour ha testenn "**Diskleriadur gwinoù ar Pobloù**" digant **EMGANN**, 7, plasenn an Eskemmdl, 44 000 **NAONED**.

Gwenael **CARADEC**

\* Izili ar c'homite etrevroadel **CONSEU** betek-hen : **EMGANN** (Breizh), **LA CRIDA** (Katalonia), **HERRI BATASUNA** (Euskadi), **A CUNCOLTA** (Korsika), **BNG** (Galizia), **PARTIT OCCITAN** (Okitania) ; sekretouriezh : **CIEMEN**, 106 Pau Claris 0 8 0 0 9 **Barcelona KATALONIA**.

### POLITIKEREZH

#### Burev boutin Breizh ha PDL

En em glevet eo an Ao.Ao. **Guichard** ha **Bourges**, Prezidanted Kuzulioù Rannvroel PDL ha Breizh, evit sevel ur burev boutin d'an div rannvro e Brussel.

Sevel a ra **UDB** a-enep d'an intrudu-se na ra van ebet ouzhi istor, sevenadur hag armerzh Breizh hag a ro ton d'un enebour touet da unaniezh Breizh.



dileuridi strolladoù Breizh e Barcelona

### KORSIKA

#### Capes nulet

D'an 9 a viz Mae e kroge amprevnoù ar c'h-**CAPES Korseg**. Ur vombezenn vokedus a voe taolet er sal gant manifesterien, studierien eus ar **CSG** ha kelennerien eus ar **SCI** an darn vuiañ anazho, a c'houlenn ma vo krouet ur gwir **gCapes** korsek, ha neket unan bastard, daoubennek evel a zo bet roet gant gouarnamant Paris.

47 den o doa laketao an anv, 15 ne oant ket deuet, 31 o doa kuitaet ar sal hag unan hepken a c'hoantaas tremen an amprevnoù.

Un trach evit broadelourien an **SCI** (sindikad kors ar gelennerien) o deus embannet e oa bet "**kontelius**" evito "**fiasca ar c'hCapes brezhoneg**" (U **Ribombu**, niv. 371).

Goullenn a ra an **SCI** e va aezet ur c'hapas korsek diabarzh (da lavarout eo evit ar gelennerien e karg ar gelenn korseg dija) ouzhpenn. Liammañ kudenn kelenn ar yezh ouzhi hini ar genofisielded a fell d'ar vroadelourien ober.

A-hand-all e c'houlennont groñs e vefe kaset kuit ar Rector **Verlaque**, mignon da **Basqua**.

### KATALONIA

#### Ar sindikad C.O.S.

Fallout a ra d'ar sindikad nevez **COS (Coordinadora Obrera Sindical)** en em ziazezañ ivez en Hanternoz, ha stourm evit labourerien Gatalonia en daou du d'an harzoù.

#### Skoazell ar gouarnamant-kreiz

Sinet en deus gouarnamant Madrid un emglev gant Generalitat Katalonia : evit diorren ar c'hatalaneg e roio 400 milion a lurioù gall.

#### 500vet deiz-ha-bloaz

"**L'any del Tirant**" a vo lidet ar bloaz-mañ, 500 vloaz goude embannadur kentañ romant katalanek "**Tirant lo Blanc**" gant **Joanot Martorell**, a oa, hervez **Miguel de Cervantes** a voe awenet gantañ, "**gwellañ levr ar bed**".

#### Deskadurezh

Prest eo **Jospin** da zegemer ar c'hapas katalanek, hervez m'en deus respontet d'ar c'hannad **P.S. Enric Sire**, e Parlamant Pariz. Nemet deiziad ebet n'en deus roet.

# EUS AR C'HONTAMM D'AR GWAD

Na hir eo bet an hent a gasas eus ar gouezded d'ur bed a lavarer hiziv an deiz, emañ-ñ sevenaet. Na leñval eo bet an nozvezhiou pa lazhas barn an istor an disterañ lutg a spi e penn ar stourmerien direbech. Na hir eo bet ar gouliou da gleizemmiñ koulz er c'horfoù, er c'halonou hag er spredoù. Nag a skoliou a zo bet ret diwall outo war hent an dieubidigezh. Ha strebotiñ a rafe hiziv an demokratelezh abalamour d'ur maen trubard anvet tu dehoù pellañ ?

Skrivadennou a redas a-hed livenn va c'hein pa glevis ar c'heloù e oa bet livet diouzh an noz etre an 12 hag an 13 a viz Mae, war werenn-dal stalioù 'zo eus kêr Kemper, un arouez a vleunie ken stank all e-skud an hevodoù. Hag asantet e vo d'an istor besteddiñ ? Ha laosket e vo ar binim d'en em silañ e pep lec'h diouzh beg glouerennek ar gasoni ouzh an estren ? Divzremmek eo ar frankizourien ha zoken an demokratelezh pa roont an tu d'ober ha da embann a-bep-seurt traou ha forzh petra. En arvar en em gavont o div abalamour d'al lezenn-se, pa laoskont "ar vosenn zu", a grede deomp ne oa ket mui anezhi,

da redek en-dro dre ar vro. Diefedus a-grenn e tiskouez bezañ medisinerzh Mezeged Veur ar Politikerezh. Daoust ha ne vefe ket digoret re frank dorioù ar c'helaoù d'ar flisterien gasoni-se ha ne cheil o daoulagad gwelout nemet war-bouez o lunedoù trivil, na cheil o bouedann-benn degemer nemet yod silat tanav gant o strizhsperedegezh ?

Arabat deomp morediñ. Ni, brezhonegerien ha brezhonegerezed hag hon eus bet c'housañv-seurt gouennelouriezh dinatur a-berzh re a dud, ni a vez graet "Breizh Atav" ach'anomp war zigarez pe zigarez evit hon tizhout e don hon fersonelezh, bezomp eveziek hag oberiant da dalañ ouzh larv du ar spere. Stourm a zo da ren hizviken a-eneb berwelians "tud ar Frañs-Atav".

N'eus ket hanter kant vloaz 'zo c'hoazh m'eo steuziet tasmant an Euzh. N'eus ket hanter kant vloaz c'hoazh abaoe m'eo bet disparlet dorioù ponner ar c'hampou-bac'h. N'eus ket hanter kant vloaz c'hoazh ma tiskennas an Ankou diouzh an oabl evit pulluc'hañ kêrioù

HIROSHIMA ha NAGASAKI. Ra chomo da viken war dremmwel hor memor, ar mein-born diziverkus-se a zegas atav da soñj ar marevezh ma wiskas MABDEN kroch'henn krizañ bleiz ar c'hoadoù.

Gant follentez al loskaberzh, an diskiantegezh, ar flatrevezh, ar spouront a zo bet lodenn bemdeziek hon tud hag hon tud kozh, eo tremen poent dibikouzañ hon daoulagad, mirout ma teule en-dro adarre an hurlink da wir. Ret eo skarzhañ kement kalon eus binim an e nebyuzevegezh, ar gouennelouriezh a c'hallfe, berad ha berad, kontammiñ ar c'horf penn da benn.

Pa n'eo ket echu c'hoazh niveriñ korfoù many KATIN, pa chom bev c'hoazh bouerien ar bobl yuzev, pa chom c'hoazh skodoù-tan e ludu an naziegezh, arabat gouzañv e vefe boutinekaet oberoù a gasas MABDEN, 50 vloaz 'zo, war hentou arvarus ar follentez, ar gouezoni, da gantreañ war vord islonk an dizenelouriezh...

Anna KERVARCHEG



# Diskleriadur SAB



## LIVADURIOU

E nozvezh ar Yaou 10 hag ar Gwener 11 a viz Mae ez eus bet livet luganioù war ti ar P.S. en Oriant. A du gant Dwan e oa al luganioù-se.

Tud P.S. an Oriant o deus savet klemm dirak al polis. Sebiantout a reont bezañ souezhet-kenañ gant an darvoud-se.

Tud Stourm ar Brezhoneg, avat, n'int ket souezhet tamm ebet. Abaoe m'ur a viz e vez gouennet gant DIWAN kaout an hevelep smglev ha skoliou Korsika hag Euskadi, pa vez paset ar skolarien gant ar Stad C'hall eno.


Mougañ hor yezh hag hor skoliou, setu aze labour an Aotrou Jospin, unan eus pennoù bras ar Strollad Sokialour. Tagañ hor stourmarien gant doareoù leuis, setu aze labour an Aotrou Joxe, unan eus pennoù bras ar Strollad Sokialour, evel en Oriant, warlene e miz Eost hag e Pariz nevez 'zo e-pad prosaz Gilbert Cabon. Skeiñ gant hor stourmarien gant barnedigezhioù ponner, setu aze labour an Aotrou Arpaillange, aze eus ar Strollad Sokialour hag eus Kevre Gwirioù Mab-Den.

Degas a reomp da soñj komzoù an Aotrou François Mitterrand e miz Meurzh 1981, pa oa deit betek an Oriant da glask mouezhoù :

"Le temps est venu d'un statut des langues et cultures de France qui leur reconnaisse une existence réelle. Le temps est venu de leur ouvrir grandes les portes de l'école, de la radio et de la télévision, de leur accorder toute la place qu'elles méritent dans la vie publique."

Kait ma ne vo ket sevenet ar promesaou-se, ne zlefe ket ar PS souezhiñ.

SAB  
Kevre Bro-Gwened



Diskleriañ a ra "STOURM AR BREZHONEG" ez eo euzhus ar gwallerzh beziou ha korfoù hag an tao liou-atalinañ gouennelour c'hoarvezet an deizioù diwezhañ un tammig e pep lec'h dre ar bed. Garvel a ra S.A.B. an dud da vont d'ar bodadegoù-nac'h a vo dalc'het ha da stourm a-enep ar ouennelouriezh hag ar pilpouserezh.

**Kentañ drougober gouennelour e Breizh : Drouklazh pobl vreizh !**

Ne ouie ket en tu-hont da 90% eus pobl Vreizh gallec'h e penn-kentañ ar c'hanved-mañ. Na oar ket en tu-hont da 95% eus ar vrezhonegerien na lenn na skrivañ hiziv an deiz : setu aze an disoc'h gant ur c'hanved gallekadur !

Daoust hag-ñ eo bet barnet ministred an Deskadurezh o doa gourc'hemenet d'ar skolarien lakaat dougen "ar vuoc'h" gant bugale Breizh evit mirout oute da gomz o yezh ? N'int ket bet !...

Pemdeziek ha dibaoez e vez ar ouennelouriezh a-enep ar

vrezhonegerien. Kandalc'het e vez ar bolitikerzh-drouklazhañ evel en amzer dremenet gant emzalc'h drouk, divergant ha torfedus ar Stad C'hall ha kement-se distañ-holl gant he benveg efedusañ : an deskadurezh Stad :

-rediet e vez ar skoliou DIWAN da gaout un niver resis a eurvezhiou gallec'h d'an nebeutañ.

-lakaet e vez yaouankizoù ar vro da zeskiñ gallec'h, rediet e vo neuze an dud kaset dirak al lezioù-barn da gomz gallec'h peogwir e ouzont.

Da ziskouez n'eo ket gouennelour ken ez eo ret d'ar Stad C'hall lakaat da vont en-dro ar gwir dic'haoc'h istorel nemetañ a c'hall bezañ :

-anavezout ez-ofisiel he c'hirigegezh evit ar bolitikerzh-drouklazhañ ur bobl kaset war-raok e Breizh.

-kelenn ar brezhoneg, istor ha sevenadur Breizh e pep skol eus Breizh.

-sevel ur chadenn skinwel a skigno e brezhoneg hepken hag ur skingomz 100% e brezhoneg.

# SPONTERIEN PE HAROZED ?



teuler

Laosket eo bet mont kuit eus e garch'ar hevlans un den hag e oa evit e varnerien ur sponter eus ar re washañ. Merket hoc'h eus, marteze ; n'eus forzh penaos ne oa ket tu da c'hwitañ taol e dieubidigezh, dre ma oa bet skignet dre ar bed en e bezh gant ar pellwell, ar skingomz hag ar chelaouennou a bep seurt. **Nelson Mandela** eo e anv.

Evel em eus lavaret endeo, ur sponter a rae anezhañ an dud o doa e vac'het dre ma stourme, hag ur stourm armet eo, a-enep da vac'homerezh e bobl ; a-enep, avat, d'ar gouarnamant a vouge e bobl, hag ar memes hini eo hag en doa e varnet.

Hogen ni, hag ar challaoued ivez zoken, a ouie ne oa nemet ur stourmer anezhañ, ha n'eo ket ur sponter. Par eo d'ar re a stourme e-pad an eil brezel "bed" (da lâret eo "Europat") a-enep da lu dalc'h an alamaned nazi ; harozet eo ar re-se moarvat, ne lavaran ket.

Met daoust hag-efi eo bet merket dieubidigezh un den all ar miz-mañ, sponter anezhañ evit e varnerien ivez ? **Jilberz Kabon** eo e anv dezhañ. Merzhet eo bet ganeoc'h-hu, lennerien vBremañ, moarvat, met gant piv arall ? Kazi nikun, sañset, dreist-holl d'an tu-all harzoù Breizh. Ha perak ? Abalamour d'ar media level war an afer-se.

Pegen aes eo gwelout sklaer an diforc'h etre ar wir sponterien (tizli ar

Front National ha gouarnamantoù 'zo end-eeun zoken ne lâran ket) hag ar re a stourm a-enep da difreizdher ha gwaskerezh er bellvroioù. Met n'eo ket gwall sklaer an diforc'h pa n'emañ ket ken pell-se achalan ar stourm, padal.

N'eo ket diaes kavout Gallaoùed ha Breizhiz hag a zo a-du gant stourmoù an ANC, an OLP hag an IRA zoken marteze awalch ; met petra a soñjont e-keñver re an ARB hag an ETA ? Sponterien inti, evel just !

Dihunit 'ta ! N'eo ket ar wirionez gant ar re o deus "gounet" (evel ar resistañs) ha gant ar re a zo pell awalch ach'an evit ne doucho ket o stourm d'hor buhez-ni hepken. Ma 'z o'h a-du gant stourm an ANC, ha ma kredit hag ez eo Mandela un haroz anezhañ abalamour d'ar stourm evit dishuaterzh e vro, petra 'ta a zo ret deoc'h soñjal e stourm hor-bro-ni, Bro-Vreizh, neuze ?

Rankout a rit bezañ reizh ganeoc'h o'h-unan. Ha ma n'em eus ket ho kendrec'het c'hoazh, soñjit un tammig : ne gredan ket-me lakaat ma anv dindan ar pennadig-mañ, dre ma vezo graet un dispac'her-sponter ach'anon evit ar pezh am eus skrivet !

War raok Breizh 'ta, gant ma vezo ken dieub ha ma teulo Afrika ar Su da vezañ !

R.B.

## Ekvador :

Unan eus broioù an Andez, en Amerika Latin : 10 milion a annezidi, div boblad disherveil :

-10% a dud wenn, ganto ar galloud politikel hag ekonomikel en e bezh, spagnoleg o yezh.

-85% a indianed pe hanterindianed, diskennidi an Inkaed, o c'hom er menezioù dreist-holl, hep galloud ebet. An darn vuiañ eus an douaroù a zo etre daouarn perc'henned vras (*latifunderos*). An indianed a zo merourien pe peizanted dizouar, a gomz kichuaeg. Betek hen e veze graet ar skollata e spagnoleg hepken, ar yezh-stad, met an indianed a veze nebeut skollataet.

-5% a dud du, diskennidi ar sklavet bet degaset gwechall.

## Skolioù divyezhek : skouer rannvro Cotopaxi

En dachenn vulkanek-se, e klask treuz-vevañ 35 000 a indianed Kichua, war an torgennoù, etre 3400 ha 4200 metrad uhelder.

Kalz eus o bugale a zo techet da zivroañ d'ar c'hêrioù bras (Guayaquil, Quito). Pa studiont er skolioù stad, e spagnoleg, ne zeout ket a-benn da gaout diplomoù, kuitaat a reont ar skoll, ha ne zistroont ket en Andez.

Abaoe 12 vloaz o deus lakaet war sav an Tad **Jose MANANGON** hag e strollad ur rouedad urzhiet a skolioù-pobl divyezhek (kichuaeg ha spagnoleg), ha berzh o deus graet.

49 skol kentañ derez a zo bremañ er rannvro, o tagemar 800 skoliad e-pad 4 bloaz.

Evit ar rummad a-us, ar "ciclo basico" ez eus 8 kreizenn deskadurezh micherel evit al labour-dour ; 550 a dud yaouank a zeu bep dibenn-sizhun da zeskiñ o micher labour-dour. Ar skolioù-stad er c'hontrol (skolioù "fiscales") n'eus ket kalz a dud ouzh o daremprediñ ...

# Skolioù divyezhek evit an indianed

Meur a abeg a zo : er skolioù-stad ne vez kelennet nemet e spagnoleg ; dilezet ha dispizet ar c'kichuaeg. N'eo ket sirius ar gelennerien ; mont a reont pe ne zeout ket d'ober o c'hentelioù ... pe diwezhat-re ...

Er skolioù-pobl divyezhek eo ar c'hontrol-mik ; da gentañ e koust nebeutoch ; d'an eil, ar gelennerien a zo eus ar vro, labourat a reont e koulz, kelenn a reont ar c'kichuaeg (implijet alies e-doug ar c'hentelioù), ar jedoniezh, ar spagnoleg, an istor, dreist-holl hini ar bobl kichua, an teknikoù labour-dour, ar mererezh. Ur wach echu ar rummad kentelioù-se e resev ar skolidi un diplom par d'ar B.C. (Brevet ar skolojoù) du-mañ.

## Ar gerent er skolioù

"Choant hon eus sikour tud ar vilajennoù" eme ur gichuaeg, studierez divyezhek. N'emañ ket hec'h unan o soñjal evel-se.

Etre daouarn ar gerent emañ kinegezh ar skolioù. Divzout a reont diwar-benn kement tra a sell ouzh buhez ar skol hag ar vro : penaos lodennañ an douaroù, penaos stummañ ar re yaouank ; sevel savadurioù nevez ; kemm, diouzh

ret, an eurvezhoù-skol hervez al labour war ar maez ; prederiañ a reont gant ar vistri war an hentenoù pedagogel ; ijinañ hag ambann a reont ganto al levrioù desavadurezh (da skouer testennoù o tanevelliñ istor ar gêriadenn).

"Tamm-ha-tamm e kas an indianed o erv war-raok", eme Daniel VERGER hag Hilda CARRERA GEORGE eus ar "Secours Catholique", o tistreiñ eus un droiad-enklask en Ekvador.

Reiñ a ra ar Stad arc'gant d'ar skolioù divyezhek. Skolioù publik ("fiscales") a zeu da vezañ skolioù-poblek divyezhek.

Rannvroioù all a glask ober an hevelep taolioù-arnod. Krog eo an indianed da vezañ lorc'h enno gant o indianelezh. Ha gant an nerzh-spere-d-se e krogont ivez da adch'ounn an douaroù bet laeret diganto (haciendas).

Prederiet eo an tad Manangon hag e genlabourerien gant ar micherioù a c'hello ar re yaouank kavout diwezhatoc'h. Setu perak e savont statioù stummañ war ar gwaderezh, an amunuzerezh, ar c'hemenañ, ar sevel-loened.

Gant berzh an obererezh-se e c'heller ivez tizhout muloch a dud, gwellaat an teknikoù labour-dour. E parrez ZUMBAHUA eo krog ar strolladoù merc'hed e pemp kêriadenn da zeskiñ d'ar re all ar gwaderezh, labour al lar, diazezoù al louzañ hag ar boueta reizh. Er memes lec'h o devo 5 den yaouank eus 5 kêriadenn, ampart bremañ war produñ ha gwerzhañ danvezioù diwanet diouzh an heiz, un traktor evit labourat ar 600 devezh-arat war un dachenn eeun (300 hektar).

"Ret eo kendeuziñ ar mekanikaat gant an teknikoù hengounel azas gant ar parkeier war zibin", eme saverien ar raktres diorren.

Ur sin evit bountañ Indianed kichua Latacunga-war-du ar memes hent, nav indian eus eskopti RIOBAMBA a zo bet urzhiet e 1989 (un nevezet e oa) evit "misionerien ar bobl" (da lavarout eo digoned). Pemzek eskob eus ar bed a-bezh a oa deuet d'al lidezezh-se.

Hervez ur pennad gant Yves CASALIS, e kelaouenn ar "Secours Catholique", Ebrel '90, Kempennet e brezhoneg gant Yann TALBOT.

## SOS YANOMAMI !

Er mare-mañ, emañ ar bobl Yanomami, Indianed eus Bro-Vrazil, o varvel gant ar malaria ha kleñvedoù-red all degaset gant ar glaskerien-aur.

Ar re-mañ a zistruz an endro, ar c'hoadeier, hag a laz ar Indianed hep bezañ trubuilhet gant ar polis. Ouzhpenn 1500 indian a zo bet lazhet e-kerz an 2 vloaz tremenet.

Daoust d'un urzh, roet gant al lezvarn gweraed, da skarzhañ eus an tachennoù Yanomami, n'eo ket deut a-benn gouarnamant Bro-Vrazil da lakaat ar glaskerien aur da guitaat an tachennoù-se l...





## BREZHONEG ER SKOLIOU PUBLIK



**BREZHONEG E SKOLIOU BRO-NAONED**

Penaos lakaat an deskadurezh da ginnig kentelioù brezhoneg d'ar vugale er skolioù publik ? Goulenn hag azgoulenn ? Betek kaout ur respont ? 7 respont a zo bet kaset en-dro da dud 'zo o doa goulnnet kentelioù brezhoneg : 7 gwech ar memes hini : "N'eus ket awalch a dud evit ma vefe savet kentelioù".

Un doare all da c'houlenn a zo sevel un enklask ha bodañ an dud a zo ganto, pe gant o bugale, ar c'hoant da gaout kentelioù brezhoneg er skol.

Ha setu ar pezh a zo bet graet gant kevrenn an APEEB e Liger-Atlantel, 60 000 follenn-enklask a zo bet moulet, da reiñ pep a hini d'ar vugale eus ar 6vet d'ar 1añ klas e skolioù hag e liseoù an departamant a-bezh.

Goude goulnnet diganto, eo bet roet ar pakadoù follennou-enklask

da renerien ar skolioù, dezho da ingaliñ d'ar skolioù. Nac'het eo bet gant lod anezho reiñ ar paperennoù neuze (ar rektor en doa kaset ul lizher-minit dezho diwar-bann an enklask o lavarout ne oa ket bet aotreet gantañ).

E 2 skol, eo bet respontet e oa bet graet an enklask, mat ne oa ket bet roet ar follennou d'ar skolidi e gwirionez.

E skolioù all, n'eo ket bet roet d'an holl skolidi.

E skolioù all eo bet dastumet ar respontoù 3 devezh goude reiñ ar follennou.

Pezh a ziskouez e tefe niver ar respontoù bezañ uheloc'h c'hoazh ma vefe bet tu d'ober an enklask gant doareoù dereat.

War-dro 35 000 bugel (diwar 59 000) a zo bet roet ar paper-enklask dezho : setu an holladoù :

	skolioù	liseoù
niver ar vugale _____	37 000	22 500
follennou roet _____	23 000	12 000
goulnnet _____	430	107
	36 a vo e 2vet klas e 90-91	e 2vet ha 1añ klas hepken +36 a vo e 2vet e 90-91

Evit ar skolioù : e 14 anezho ez eus 10 bugel pe ouzhpenn (betek 31 !) a c'houlenn kentelioù brezhoneg e stumm un eurvezh sevenadur bep sizhun.

Hag e 4 lise ivez : hini Savenay, hini Rezé (er c'hreisteiz d'al Liger) ha 2 e Naoned : Albert Camus ha Les Bourdonnières, ma 'z eus bet goulnnet kentelioù yezh e stumm 3 eurvezh bep sizhun (L.V.3).

Ar bloavezh-skol-mañ e oa kentelioù brezhoneg :

- e 2 skolañ e Sant Nazer : A. Vinçon hag unan all, e stumm eurioù ouzhpenn, gant ur PEGC.
- e 2 lise e Naoned : La Colinière ha Les Bourdonnières, e stumm yalchadou (vacations) gant "ur c'huzulier e skol normal Naoned". (Met ne oa skolid ebet er bloaz-mañ evit tremen brezhoneg er vachelouriezh.)

Gant ar sifrou-se en o chakodoù, eo aet tud APEEB Bro-Naoned da welout rektor nevez akademiezh Naoned, d'ar 7 a viz Mae. Goulnnet o deus ma vo krouet 2 bost kelenner a-benn miz Gwengolo a zeu.

Respontet an deus ar rektor e c'houlennfe kaout ur post evit ar bloavezh 90/91.

Mat e vefe klask gouzout perak eo bet nac'het gant renerien skolioù 'zo ober an enklask. Aon rak ar wirionez e-keñver ar brezhoneg ?

Gwallziforc'herezh ? Alato ! Gwallziforc'herezh ne c'hell ket bezañ a-barzh an deskadurezh-Stad an deiz a hiziv ...

Lavaromp ouzhpenn eo bet ur pezh mell labour evit meur a hini : labour skignañ an enklask, darempredañ gant ar skolioù, hag ar rektor ... ha labour a chom c'hoazh war ar stern ... Met an doare nemetañ eo da lakaat an deskadurezh-Stad da blegañ.

J.Y. BROUDIG  
R. MOGN

APEEB Liger Atlantel,  
3 Siraed Harrouys  
44000 NAONED

## AN HEVELEBIEZH VREIZHAT

Barzh an deus graet ar c'hendiviz kaset war-raok gant skol DIWAN Gwitlameze e penn kentañ miz Meurzh. Tro-dro da 70 den a oa deuet da selout prezegennoù 2 zen ampart war an etnopsikiatriezh, an Ao. KRESS hag an Ao. DAUMER. Ouzhpenn selout o deus graet an dud, rak meur a zen o deus roet o sonj e-pad an diviz.

An Ao. KRESS en deus displeget dre beseurt doareoù eo aet ar brezhoneg war-gil, hag an efedoù psikologel war an dud o deus gouzarvet ar c'hemmoù-yezh.

### Ur c'hendiviz kentelious

Da vare ar rouantelezh, muioc'h eget 2/3 eus an noblañs e Bro Frañs a gomze ur yezh disheñvel diouzh ar galleg ! Met an dispac'h gall ha diazezzadur ar Republik, droist-holl gant krouidigezh ar skol lak ha ret, o deus hastet diskar ar yezhoù rannvro. Ar gerent o deus kenlabouret o lakaat war o bugale o c'hoant da uhelaat o stad er gevredigezh. War ar memes tro, ar re-mañ o deus moustret war ar yezh bihanaet, disprijet, lakaet ganto evel a chiz kozh. Lavaret eo bet gant an Ao. KRESS o deus an dud klasket en em zisammañ eus al lodenn guzh pe ar muiañ dianavez eus o farsonelezh. Ar brezhoneg a zo deuet da vezañ yezh ar vevzh hag ouzhpenn difennerien ar galleg a oa tud lorc'hus !

### Efedoù ar c'holl-yezh

Kollat eo bet ar yezh en ur ober tri rummad tud : ar re gozh a oa unyezhegerien vrezhonek pe dost, ar rummad kreiz a oa divyezhegerien anezho met n'o deus komzet nemet galleg d'o bugale hag an trede rummad, ar re-mañ ne gamzont ken nemet galleg, eveljust. An Ao. KRESS en deus graet kaoz eus ar "c'hanv dibosub" da laret eo n'eo ket bet kollet ar yezh gant ur rummad tud resis met kentoc'h 'e bet kollet etre ar rummadoù. Ar familioù o deus savet o bugale gant ur yezh nevez ha n'o deus ket gallet perc'hennañ anezhi mat a-walc'h, da skouer evit diskouez soutilid o "santimantoù" personel.

Lakaet eo bet skoz-ouzh-skoaz an diaesamantoù-mañ gant kudennoù an dud a zo izelaet o spered. Sklaer eo ivez ez eo uheloc'h dregantad ar c'hudennoù alkoolegezh e Breizh.

An Ao. DAUMER en deus displeget petra 'oa danvez hevelebiezh un den : un darempred disheñvel gant e yezh, gant relijion pouezusañ e vro hag un doare karantez ouzh douar e vro. Diskouezet an deus emdroadur ar gevredigezh breizhek abaoe 50 vloaz betek hiziv : gwechall, pep hini en doa ul lec'h resis e-barzh ar gevredigezh, ar re baour avel ar re all. Bremañ ez eo gwellaet stad danvezel an dud evel just, mat kalz traoù a-bouez a zo bet kollet. Peseurt talvoudegezh o deus bremañ, da skouer, an darempredoù a vez etre an dud er c'hêrioù bras. Peseurt efedoù o deus bet ar c'hemmoù-mañ war an hevelebiezh vrezhekek ?

N'eus ket da gaout keuz d'an amzer gozh mat ret eo anavez skolioù ar bed modern. Gwechall e oa dalc'het an dud gant al lezennou. Hiziv eo laoskoc'h an traoù hag eo aet pouez ar relijion war gil.

Evit an Ao. DAUMER eo ret ober ul liamm gant an niver brasoc'h-brasañ a dud o'ch en em zistruañ. Div wech muioc'h a dud en em zistruj e Breizh, eget e Bro-C'hall.

### Stourm ar yezh

War-lerc'h an div brezegenn vrasse ez eus bet kaoz eus ar stourm sevenadurel a zo bet abaoe ar bloavezhioù 60 : lavaret ez eus bet e oa e bal kemmañ ar skouenn negatvel a oa gant ar yezh d'ar marese ha reiñ dezhi ul lusk hag un nerzh nevez.

Ar brasañ eus ar selouerien, en o zouez Aifons ARZEL senatour-maer Gwitlameze, o deus lavaret ha doa an hevelebiezh sevenadurel un dalvoudegezh vras en deiz a hiziv. N'eo ket abalamour ma 'z'gar war zu unvanidigezh an doareoù bevañ e ranker en em zistagañ ouzh hon gwirioù.

Dav eo komz eus an holl draoù-mañ forzh penaos evit kas kuit ar yezh

diwar dro ar re a oar ar yezh. Un dazont laouen d'ar brezhoneg neuze ? Ya, ma kamerer skouer war ar gendirvi gembreat : o yezh a ya war wellaet zoken e traoù ar vro e-lec'h ma 'z'eus graanterezhoù bras, rak ar gembreiz a gar o yezh !

"Ma fell deomp derc'hel anezhi, e vo dalc'het". Setu ar pezh en deus laret an Ao. DAUMER. Doust ha ma teu an den da vezañ ur c'hsodadour eus ar bed a-bezh en devo ezhomm bepred eus gwirioù e rannvro.

Mikael KONK

(Hevelebiezh : da gompren evel "identity". Ha gwelloc'h ger 'zo ? BREMAN)

36-15

**KELAQUINN**  
Kuzenn deizmaer  
brezhonek galleg

**TC / KELA**

36-15

- Kaler ar vro
- Gouelioù, Festoù noz ...
- Lertioù nevez embasaet
- Skol Ulz Ar Vro
- C'Hoarioù

### DEIZ AR BREZHONEG E ABERYSTWYTH

Dalc'het e oa "Bwrlim Breizh", Deiz ar Brezhoneg, e Aberystwyth d'an 12 a viz Mae.

Ar brezegenn digorñ a zo bet graet gant an Dr Gwynfor Evans gant komzoù kreñv a-enep ar pezh a ra ar C'hallaoued e Breizh evit lazhañ ar Brezhoneg.

Evit klozañ an devezh kelaouiñ-mañ (film, prezegennoù, kanaouennoù, diskouezadegoù) ez eus bet ur fest Noz vras gant Kanerien Kan-ha-Diskan.



# AR GALEOU

Na pet gwech em eus klevet tud aet e kounnar gant kresk ar felliezh, o'ch embann ne oa ket kastizet kriz a-walc'h an dorfedourien e toullou-bach an amzer vremañ, e oant kolladennet eno zoken hag e oa ret adsevel ar galeoù e Gwiana. An dud-se na ouzont ket peurliesañ peseurt buhez amañ ar brizonidi o ren hiziv an deiz, na kennebeut peseurt tonkad a ranke gouzañv ar c'haleourien e Gwiana.

Gwiana a zo un tolead a vent gant Bro Bortuga pe Bro Aostralia, un tolead koadek stank, un tolead gleberek ha tomm bras e hinad, un tolead eus ar c'hentañ evit en em zizober eus an dorfedourien, eus ar nagennerien, eus an dreitourien. An eil war lerc'h eglie e voe goullondoret kampoù-bach pe vrobenn. Estreget Gwiana a voe dibabet e-touesk an trevadennoù evit kastizañ enebourien ar goaded. Dilestret e voe kondaonidi e Kaledonia-nevez ivez, un douar na oa ket evit Gwiana hervez tud'zo da laakaat an drougobourien da geuziñ d'o dizonesist pa ne oa ket an amzer eus an diyaçhañ enañ.

Etre 1854 ha 1938 e voe kaset tost 700 000 a c'haleourien da Wiana. Hervez al lezenn e rankent seveniñ labouroù startañ an trevadennañ ha kement labour all a veze forañ e zalvoudegezh. An dud barnet da verrac'h eget eizh bloavezh galeoù a ranke, pa veze deut termen o amzer, chom keit hag o c'hastiz evel trevadennerien e Gwiana. Ma vezent barnet da reizh bloavezh galeoù d'ar berrañ e rankent chom e Gwiana betek fin o buhez. Pebezh misi evit ar blanterien donedigezh al labourerien dibae-se. Kemer a raent en o farkedoù kotoñs ha korz-sukr, lech o sklavedu da oab bet lezet da vont war-lech dispac'h 1848.

Strewet e veze ar c'haleourien e meur a gamp etre ar Kayenn ha stêr Maroni, ur stêr a na disparti etre Bro Surinam ha Gwiana hag a zo en hec'h aber un enezennig a veze dilezet warni ar re lovr. Ken maget fall e oant, ken tenn e oa al labourerion a rankant kas da benn, ken ma varvent a gantadoù. Ret e oa bezañ kreñv, start ouz ar skuizhder evit chom

bev. Bez e oa kampoù evit ar re wenn, evit ar re zu, evit ar re gozh, evit ar re glañv hag ar re gabac'h. Etre 1859 ha 1903 e oa zoken ur c'hamp evit ar merc'hed. Kaset e veze ar re disuj da gampoù ar goaded, ar c'hampoù spontusañ, lech ma falc'he buan an Ankou ar buhezioù.

Dilestret e veze ivez galeourien en inizi ar silvidigezh, teir enezennig a zo montleizi o neriñ en-dro dezho, un enezeg a zo yachusc'h an amzer enni eget war an douar bras met na oa tu abet tec'hout diouti ha pa vele "Balafenn" e lesanv.

Loun chouk e veze peurliesañ ospital ar galeoù, gant an diyaçh ma oa ar vro. Aet diviet gant an trevail, aet bresk gant an diouer a voued, louzaouet fall, e varved diwar ar vid, an amwad, an droug-skevent hag all. Un fern a oa eus bad ar galeoù, un fern a glasked evel-just achap dioutañ. Pa veze tapet an deç'hidi e vezent barnet da dremen etre 6 mizvezh ha 6 bloavezh e kelioù enk enez Sant Josef, en inizi ar silvidigezh. Ar re o doa graet torfedoù e-kerz o zec'hadenn a veze barnet da vezañ dibennet.

Feuketoc'h-feuketañ e teujod da vezañ gant krizderi ar galeoù. Estreget abegoù denegour a voe kiriek da dilez ur seurt kastiz. Ker-spontus e kouste kampoù-bach Gwiana d'ar stad. Serret e voent e 1946.

E 1977, e oa bet darbet da brizonidi zo ober roue war-du un douar-bach nevez. Ne vijent ket bet kaset da Wiana ar wech-se met da inizi Kergelenn. E-kerz ur vreatadeg e kamb ar deputeed diwar-benn dazont an dibennerezh, e kinnigas un dileuriad aber eus an enezeg diandket-se un douar harlu evit an dorfedourien echu. Ken ker e vije bet diwall un nebeud kondaonidi keid-all diouz an disterañ bro gevannez ken ma voe nac'het ar c'hingig kerkent ha jedet ar c'houst, ur c'houst a vije bet war-dro seizh miliard a lurioù kozh bep bloaz.

Paol AR MEUR

K.B.

## KEMBRE

### Ur manati katolik o vont en-dro e kembraeg

Eus ar 16 d'ar 25 a viz Eost ez aio un nebeud kristenion brezhonegerien da weladenniñ hor breudeur tramor, kembreiz. Divizet o deus mont da dremen ur sizhunvezh en ur manati du-se, e "Mynachdy Dewi Snat", nevez diazezet eno gant Kumuniezh Leon Youda hag an Oan Aberzhet, war c'houlenn eskob katolik al lech, an Aotrou n'Eskob Mullins.

War gresk ez a iliz katolik Kembre; nevez 'zo ez eus bet krouet un trede eskopti ar vro, hini Manavia. En e bann eo bet anvet an Aotrou n'Eskob Mullins, un iwerzhonad. Izel eo c'hoazh niver ar gatoliked e Kembre e-keñver ar boblañs: ur c'hant mil bennak evit 3 milion a dud o chom ar vro-se. Ha c'hoazh, e-touez ar c'hant mil-se ez eus kalz a iwerzhoniz ha poloniz divroat (pe o bugale). Dre-se ez eo izel-tre niver ar gatoliked a zo ar c'hembraeg o yezh-vamm: ur miliard hepken.

Daoust da se en deus divizet an Eskob Mullins ma vefe kelennet ar yezh d'e gloareged. Iskiskoc'h c'hoazh, en deus goulenet digant ur gumuniezh gatolik c'hall dont d'en em ziazezañ en e eskopti, ha da implij ar c'hembraeg en he manati, p'emañ 99% eus e fideled o saoznegañ!

Kristenion Breizh az aio du-se evit ober anaoudegezh gant ar gumuniezh gatolik kembraek-se. An dud dedennet gant ar vezj a rank skrivañ da "Kristenion Breizh, Lez Hlog, Pempont 35380 PLELANN VRAS, 99 07 85 03". Lodennet e vo ar frej, ne vo ket koustus-tre, forzh penaos.



Rot un Wiss Niv. 156 - miz Mae 90

Ur pennad diwar-benn kudennoù skolioù Diwan a vo kavet ar gazetenn-mañ-P. 11, e Alzasaneg-hag un all diwar-benn Boycott an niveridigezh e Bro Eizas-Loren.

AN DASSON niv. 17 20 lur

Ar wech kentañ eo dimp gwelout un niverenn eus ar gelaouenn divyezhek trimiziek-mañ, plijus da lenn ha kinniget brav, a vez embannet gant "Kerlenn Sten Kidna" an Alre.

Pennadoù gallek a-zivout an Istor, Breizh adunanet, h.a., ha pennadoù brezhonek a bep seurt.

AN DASSON, 30 straed P. Allio Brec'h 56 400 AN ALRE BRUD NEVEZ, niv 134

536 kuzul-kêr a c'houlenn ul lezenn-stur evit ar brezhoneg, a zasker e pennad Armañs Keravel diwar-benn "ar strivadenn evit lezenn ar yezhoù". Ur pennad klaskerezh a zalvoudigezh a-hend-all eo hini Mikael Madeg a-zivout "an divrezhonekaat e Bro-Ieñ".

BRUD NEVEZ 6 straed Beaumarchais 29 200 BREST

Gweledegezhioù Alanig

Ur pezhig-choari evit krennarded eo al levrig-mañ a zo o paouez bezañ embannet gant U.G.B., 15 lur an tamm.

(U.G.B., e ti Mark KERRAIN, 50 Ar Mailh, 35 000 ROAZHON)

## SKINGOMZ : DISTRO

Selaouerien "Du-mañ, du-hont", abadenn vrezhonek sizhuniek Radio Arvorig a oa ehanet abaoe an 28 a viz Ebrel, o dije gallet klevout brezhoneg en-dro disadorn diwezhañ 26 a viz Mae, eus Kreisteiz da ziv eur, ma vijent bet kelaouet en a-raok.

Gant Denez Prigent, bet gantañ priz Kan ar Bobl hevlene, e oa kinniget an abadenn. Chañs vat zo da hetñ dezhañ gant an abadenn-se, a oa bet krouet, ma ne faziomp ket, gant Charles Ar Gall, a-raok bezañ fiziet e Fañch Broudig da gentañ, e Loeiz Gwilhamod da c'houde, ha, da ziwzhañ, e Mikael Baudu, a zeuas a-benn da hiraat anezhi eus un survezh.

Kalz a sonerezh hengounel, eme Denez Prigent a vo roet dimp da glevout, ha kanaouennoù a Vreizh Uhel ivez. N'eo ket sur avat e plijfe kement-se d'an holl vrezhonegerien, pa n'eo ket sonioù gallek emaint o c'hortoz digant un abadenn an o yezh.

Spil zo da gaout e ve klevet ivez pennadoù-kaoz gant tud a bep seurt, rak skuizhus e vez salaou ar memes mouezh e-pad div eur, forzh pegen kaer e vefe ar c'hanaouennoù mod-kozh a-hand all.

Brav e vefe ivez klevout kaoz, evel a-raok, eus an embannadurioù nevez, levrloù ha kazetennoù, e brezhoneg, hag eus an oberoù kaset en-dro gant ar vrezhonegerien, war dachenn ar sevenadur pe ar politikerezh.

Mantrus e vefe ivez koll an hanter eurvezhig a gelaier sizhuniek a ginnige dimp Mikael Baudu pa oa, hervez ar boaz eus ar selaouerien faal, lodenn wellañ e abadennoù.

Chañs ha kalon da Zenez Prigent en e labour evit ma c'hallo kinnig dimp un abadenn sizhuniek liesseurt ha buhezek.

Herve Pennek

**Keleier**

**STAJOU :**

STAJ BREZHONEG : e Minihi Levenez, Trelevenez, adalek an 9 betek an 13 a viz Gouere. Evit bugale adalek 6 vloaz ha tud en oad.

STAJ BRODEREZH : e Maner Keranden, Landerne, adalek an 10 betek an 13 a viz Gouere, kaset endro gant Paul Balbous. Priz 600 lur (staller, boued da verenn, prezegennoù). Evit lakaat e anv : GAC, Maner Keranden, Landerne, 98 21 61 50

DISKOUZEDEG WAR AR BRODEREZH : e Maner Keranden, adalek an 29 a viz Mezheven hag an 19 a viz Gouere, azot gant ar GAC ha Kevredigezh Saveteiñ Dilhad Kozh ar Vro. Diskouezet e vo ano Broderezh Kerne ha Leon, broderezh nevez, ha krouidigezhioù stal broderezh ar GAC. Priz 15L.

*Lennit al liamm*

Koumanant bloaz 150 lur

(studierien, soudarded ha tud dilabour : 100 lur)

Skriwañ da : **AL LIAMM 16, stradaed des Fours à Chaux - 35400-St Malo-**

**KEMENNADENN**

**Golioù-lizhiri**

Embannet ez aus bet gant CUAB - Maez ar Vro golioù-lizhiri nevez a ziskouez Kartenn Vreizh gant skolioù meur Brest, Roazhon ha Naoned.

Kaset e vezont dre ar post pa vez goulennet 500 da nebutañ (150 lur ar re vihan, 180 lur ar re vras). Mat e vez d'ar chevredegezhioù sevenadurel prenañ digant ar c'GUAB da werzhañ en o stalioù goude. Al lizhiri-gourc'hemenn hag ar chekennoù da gas da Eric Pianezza Ar Pach, 106 Chemin de la Côte du Moulin, 78520 L'ETANG LA VILLE

**gerioù-kroaz miz Mae**

1	A	R	D	I	V	I	N	K	E	R
2	K	E	I	N	A	D	U	R	E	
3	A	D	S	K	O	L	I	A	D	
4	R	A	K	T	A	L	B	R	O	
5	D	A	R	N	L	A	N			
6	M	E	M	E	S	I	N	T		
7	G	E	M	E	N	E	E	A		
8	M	L	E	R	E	N	N	A	N	
9	E	R	E	N	A	D	T	A		
10	L	O	D	P	E	N	E	R	V	

**MIZ EVEN 90**

1									
2									
3									
4									
5									
6									
7									
8									
9									
10									

- A-LED**
- 1- BEPRED EZ EUS UL LABOUR GANTAN HAR AR STER
  - 2- E DIAVEZ AR STAL.
  - 3- DEC'H, HIZIV PE MARC'HOAZH.
  - 4- ANV BIHAN - EDAN AN AVEL.
  - 5- KAS EN-DRO.
  - 6- UNAN VRAS HAG UNAN VIHAN E-TAL KEMPER - ANV ZO ANZHAÑ.
  - 7- CHOM A RA FEAL - DIGOUSIET, BEZ EUS UNAN A-US DEOC'H MOARVAT.
  - 8- GOLEIN A RA UN NEBUD FROUEZH.
  - 9- A-US DEOC'H ATAV ? - KEIN UNA ANV.
  - 10 UN DRO GAMM - UR SANT E-TAL HOR BREIZH.
- A-SERZH**
- I LEUN A BLANTOÙ DIVLEURV -2 C'HOAR.
  - II KOUERV HA STAEN - BINVIACHOÙ.
  - III NEPELL DIOUZH ANSENIZ.
  - IV O ZREIN A RIT MEUR A WEZH BEHEZ.
  - V EUEN - DEVERAN A RA E BREIZH.
  - VI PAOUR-KAEZH RE.
  - VII ICH FALL, HAR BLEV AR MERC'HEG GHEZHARALL.
  - IX NOTENN, A-ZIVOUT AR GOUENN.
  - X TABUT, EVEL LAEZH KADULET, TOUA-DENN.

**MIZ MEZHEVEN 1990**

Lizhiri..... 2  
 Petra NEVEZ ?..... 3  
 Diwan Komana..... 4  
 Pennaod-kaoz..... 5  
 6  
 7  
 Nitrat e Breizh..... 8  
 CONSEO..... 8  
 Korsika..... 8  
 9  
 Kontamm ar spered..... 9  
 Diskleriadur SAB..... 9  
 Mandela-Kabon..... 10  
 Divyezhegezh..... 11  
 Bro Naoned..... 12  
 Hevelebiezh Vreizhat..... 13  
 Ar Galeou..... 14  
 Kembre..... 15  
 Kelaouennoù..... 17  
 Stajoù..... 18  
 Keleier..... 19  
 Gouelioù..... 20

**Ar pennadoù gant Gwenael Caradec, Diwan, M.B., YL, Anna Kervarc'heg, SAB, RB Yann Talbot, J.Y.Broudig, R.Mogn, Mikael Konk, Bernez Kadored, Paol ar Meur KB, Lena Louarn, Herve Pennek.**

**Ar maketenn gant Jean-Michel Roynard- Lena Louarn**

**Tresadennoù gant Tudu, Nono, Malo Louarn.**

**Luc'hskeudennoù gant B. Kadored, O.F., Dominig Jolivet, Lena Louarn.**

**RENEREZ BREMAN Lena LOUARN**

Moulet e ti SUPER PRINT e Roazhon

Koumanant bloaz 150 lur, estren-vro : 200 lur, skoa. zell adalek 200 lur.

*Kasit ho chekem da Vre-mañ 8 ru Hoche - ROAZHON*  
**SKRIVIT E-BARZH BREMAN !**  
*Kasit ho pennad ha luc'h. skeudennoù a-raok an 30 a viz Even evit nivernn doubl an HANV. Trugarez!*

**Dudi**

**keleier**

**Hon mignoned**

Kresket an dud e ti Maleuvra-Gourmelon, e Gwengamp, gant ganedigezh ur c'hoar da Hoel, KOUPAIA hec'h anv.

Lidet en deus Gweltaz ar Fur 20 vloaz a gan ha 10 vloavezh a gouerzh gant e stal "Ar Bed Kelliik" e Kemper.

Laeun eo Morwenna JENKIN ha Mikael BAUDU da gemenn deoc'h eo ganet RIWANA d'ar Sul 27 a viz Mae e Brest.



**Deiziadur Mezheven LIVOURIEN E BREIZH**

**eus 1850 da 1950 gant Jakez CORNOU**

D'ar Gwener 8 a viz Mezheven 1990, da 9 eur noz, e vo degemeret Jakez CORNOU gant OALED ABHERVE, Krezenn Vreizhek Sant Breg, 9, stradaed J.J. Rousseau. E galleg e vo graet ar gaozeadenn.

Komz a ray ar prezeganner eus al livourien e Breizh eus 1850 betek 1950, en ur ziskouez bannadurioù-lev.

Mour a levr en deus skrivet Jakez CORNOU, en o zouez *Les Loups en Bretagne*. Istorour Bro Vigoudenn eo-eh ivez hag unan eus pennoù ar gelaouenn *Gap Caval*.

- D'ar 14, 15 ha 16 : Donoù digor e Skol Diwan Gwengamp.

- D'ar Sadorn 23, e **Baurleudi** (etre Pontrev ha Bear), e maner Kerveziou, tantad ha fest-noz. Rostet e vo ur porc'hell ouzh son ar binioù. Azot eo an abadenn gant Skol Diwan Gwengamp hag Amzer Nevez Paderneg gant sikour menaj ha tavarn Kerveziou.

"Ar Gripi Glas", kazetenn re Chlas bro Sant-Brieg, a gemenn deomp e vo ur Gouel Vras e-pad 2 zevezh e Kêr Yugon, "Jugon-Les-Lacs" (Aodoù an Arvor).

**GOUEL AN DOUR 23 ha 24 a viz Mezheven.**

**BREMAN**

**Skoazell da Vre-mañ !**

Goulenn a reomp digant hon lennerien klask koumanterien nevez da Vre-mañ. Bep an amzer e vez kaoz a sevel ur gazetenn divsizhuniek, pa n'eo ket sizhuniek. Sklaer eo ne vo biken tu da dizhout ar pal-se hep bezañ diazezet mat ar gazetenn vrezhonek namet! ro keleier miziek d'ar vrezhonegerien.

**Keleier**

Keleier hor bez eus stourm pobloù Katalonia, Korsika, Euskadi, hag all, dre ar c'hazetennoù a vez kaset dimp eus ar broioù-se. Kaset e vez dimp "EL PUNT", "U RIBOMBU", "ENBATA", a zo sizhuniek, hag un nebud re all. Kenskriverien all a gas deomp pennadoù mareadek.

Siwazh n'eo ket tra-walc'h.

Kenskriverien e Breizh hon eus ezhomm da gentañ. Dre ma vo unan evit pep bro eus Breizh. Roit hoc'h anv.

**BREMAÑ 8 ru Hoche 35000 ROAZHON**

**ADKOUMANANTIT DA V-**

**breman**

150 lur ar bloaz

**Respost d'an divunadenn**


Ar galleg, eveljust ! (Evel ma 'z aus bet skrivet nevez 'zo war gannadig ur vourc'hig vihan a Vro-Bariz, da geñver ur "Gouel ar C'hallegouriezh" bennak : "la langue française, claire et directe, subtile et nuancée, reste la meilleure alliée des poètes"). Tu ebet da dreñ komzoù ken flour e yezh all ebet, neketa ?

B. Kadored

**GOUEL DIWAN 1990**

**Sal ar sterenn e Tregon**

**Sadorn 16 a viz Mezheven**




- 14e-16e30 : Arvestoù aozet gant ar vugale (hervez kinnigoù gant ar skoliadoù).
- 15e30-16e30 : Diviz gant AN HERE : an Heuliad Skolig al Louarn, Ar Geriadur Hollvrezhonek ; sinadeg-levrioù er standoù-embann.
- 17e30-18e30 : Arvest "AR PRIÑS BIHAN", gant Strollad Plougin (c'hoariva).
- 19e : Pred-boued (gant ma vo miret a-raok an eur).
- 21e-22e30 : C'hoariva "KENAVO MY LOVE", gant Strollad ar Vro Bagan (c'hoariet evit ar wech diwezhañ).
- 23e-2e : Fest-noz gant "STROBINELL".



**Sul 17 a viz Mezheven**

- 10e30-12e : Kendiviz-dael-breder gant Genevieves VERMES : "Prizout an divyezhegezh hag hec'h efedoù meizidik".
- 12e : Pred-boued (goude ma vo bet miret a-raok an eur).
- 14e : Diskuilh disoc'hadennoù ar genskrivadeg.
- 15e : Jean-Luc ROUDAUT eus "Rêves de Gosses".
- 17e : Mona BODENNEG.



War leür ar gouel e vo : standoù, diskouezadegoù, bevañs, evach, ur wardiri evit ar bugaligoù ha c'hoarioù aozet a-ratozh evito.

Tu a vo ivez da gampiñ eno diouzh an noz.

**KANN AL LOAR 1990**

e Kêr Landerne

**D'ar MERC'HER 11 a viz GOUERE**

Kristen NOGUES, Naïg ROZMOR, Mari KERMAREC ha Christiane MALEZ : "Ce pays vers la mer" barzhonegoù kan ha sonerezh.

Strollad ar Vro Bagan : "Cantique à Meilla".

**D'ar YAOU 12 a viz GOUERE**

SONEREZH-HA-CHOLORI e kêr an devezh-pad,

DISKOUEZADEGOU war Bont Landerne : artizaned, embannerien, kevredigezhioù sevenadurel pe arzel ...

KERGRIST : Molute Lambda (krouidigezh).

GOUEL AR VUGALE aozet gant Ti an Holl. E kêr, diouzh ar mintin, c'hoarioù red-ha-klask, savet diwar-benn istor, geografiezh, kontadennoù ha mojennoù ar vro ...

Patrik EWEN

ABADENN E ROCH MORVAN : Alain LE GOFF (konte) : Tristan hag Izold, DREMMWELL, FEST-NOZ gant DREMMWELL ha KANERIEN LANGAZEL.

**D'ar GWENER 13 a viz GOUERE**

SONEREZH e kêr un devezh-pad, gant MORZEN ha Paul WRIGHT.

DISKOUEZADEGOU artizaned, embannerien, kevredigezhioù sevenadurel pe arzel.

E ILIZ SANT HOUARDON : YHUEL-CARON, ograoù ha bombard ; LAZ-KANAÑ SANT KARANTEG : Kanenn evit Marzhin.

FEST-NOZ VRAS MOD-KOZH : AR BREUDEUR MORVAN, GUILLOU-MARCHAND, Paol Ar Gall, MOLARD-BIHAN, PHILIPPE-THOMAS.

**D'ar SADORN 14 a viz GOUERE :**

GILLES SERVAT hag AN TRISKELL : "Confluent, 20 vloaz war al leurenn".

FEST-NOZ gant STROBINELL, ARPEGE MELBA, PRIGENT-LECLERC.

**Priz ar gartenn evit mont d'an holl abadennoù : 150L, da brenañ e Ofis an Tourism Landerne**

